

Nnn 135

Louarnieg

Sell d'zho er bed en ur mod disthenvel

Medele g Laouen Dit!



En niverenn-man :

P.3
PAOTR
LOUARN



P.10
3D
E GAVRINIZ



P.13
Naggeneen



P.7
SEKRED
KEGIN!



P.6
LABOUR
DORN



MOJENN
AR MAIZ
RUZ P.8

P.14
OSPITAL AL
LOENED



P.16
MEURIAO

En niverenn o font...



Louarnig

Mensual - N°135
du 1^{er} Décembre 2013
5€ an niverenn / 5€ le numéro
60€ ar bloaz / 60€ l'année
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /
Dir de Publication :
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhierz ha maketenn
Coordinatrice et maquettiste :
Camille Argouarc'h,
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU

Skeudennoù a zo implijet gant Aoch
Implijout Creative Commons Ders
Kenrannañ

Certaines images utilisées sont sous
licence libre Creative Commons ou
<http://www.photo-libre.fr>.


<http://www.creativecommons.org>

creative commons

Embannet gant skoaz
Avec le soutien de



SANDRINE, PEGEN
POUNNER EO UR
BABIG OLIFANT ?



Goulenn gant
Tivizio eus Brest



Tivizio ,

Pounneroc'h eo ur babig olifant nevez-chanet eget
un den : etre 90 ha 120 kilo hervez e orin, Azia
pe Afrika. Pounneroc'h eo ar bared eget ar pazed.
Ur babig tev eo an olifant bihan, chomet e kof e
vamm e-pad 22 viz ! En he c'heñver avat, ouzhpenn
3000 kg, e seblant an hini bihan bezañ dister-
tout ! Ijin'ta ! Da vare e 6 vloaz, e vez an olifant
bihan ken pounner hag un donenn. Ur wech tapet
gantañ e 15 vloaz e paouezo da gemer pouez.

Abred a-walc'h e oar an olifantig penaos ober gant e drompilh
evit kregiñ e-barzh lost e vamm a-benn mont d'he heul. Ne
implij ket anezhi a-benn bezañ maget : gant e c'henou e ra
evit se. D'an oad a 6-8 miz hepken e tesko an olifantig penaos
implij e drompilh evit bezañ maget. Maget e vo gant e vamm
e-pad pell, betek o 10 vloaz, a-wechoù, evit lod.

Gouzout a rez pelec'h en em gav tezhioù (bronnou) ar mamm
olifant ? Er memes lec'h ha re ur vuoc'h pe ur gazez ? N'emaint
ket. War ar bruched emaint, a-dreñv ar pazioù dirak.

Ken ar wech all !

Sandrine

Ma 't eus c'hoant goulenn un dra bennak e-keñver al
loened ouzh Sandrine, ar vedisinez-loened, kas ur goulenn
din. Ha ma rez un dresadenn, e vo embannet ivez !
Skriv ur postel da : camille.kvb@orange.fr pe ul lizher da :
Louarnig, Kelt Vimp bev, 22 grand rue, 29520 Laz

KENDER'HEL
A RA D'EN EM
DREUZFURMIÑ.
O TREIÑ DA VLEIZ,
PENN-KIL-HA-
TROAD, EMAÑ !

NE C'HELL KET
PIGNAT KEN.
DIV EURVEZH ZO
EMAÑ O KLASK.

AR WECH KENTAÑ
DEZHAÑ DA ZONT
A-BENN EN DOA
RIKLET, HA
BREMAÑ NE ZEÜ
KET A-BENN KEN.

KELOÙ MAT !
'BLAM D'AN
ANOUEG
HEPKEN E
VARVIMP.

E!

PETRA
EO SE ?


PAOTR-LOUARN
RANN 30

NE GLEVAN
NETRA
ABALAMOUR
D'AN AVEL.

TROUZ UR
C'HEFLUSKER ?

UR BLADEREZ ERCH ?
MOAIEN DA VEZAÑ
SIKOURET !?

**EEEE !
AMAÑ !**



UR BLEIZ AN HINI EO ?!

KEN BRAS E C'HELL BEZAN ?

E BEGEMENT EN DEUS BET.

MA DOUE HA MA.

SERR DA VEG!



AMAN!



AMAN ...
'MAOMP



HIPOTERMIEZH.

N'EO KET GLOAZET. BURZHUDUS.

HEP AR C'HI N'HON DIJE KET ADKAVET ANEZH.

AET OMP.




HAG AL LOEN ?

RISKL EBET KEN.



KASOMP ANEZHAN ANEOMP



SETU EN EM
GAVET EO FIN
AN ISTOR-MAÑ.

BERRAET EO BET
AR SIZHUNVEZH
VAKANSIÑ.

DAOU ZEVEZH
O SKIAÑ. UNAN
GANT DARVOUDOÙ
SPONTUS ER
AR MENEZIOU
HA DAOU ZEVEZH
O TISKUIZHAÑ.

HA SETU MA
5 DEVEZH
TREMNET E
BRO-ALVERN.



NE OA KET MARV
AL LOEN.

GOUDE BEZAÑ
BET LOUZAOUET
HA STUDIET PIZH
EO BET KASET
DA BARK LOENED
BRO-ALVERN,
UNAN
ARBENNIKAET
WAR LOENED
AR MENEZ.

LAKAET EO BET E-TOUEZ
AR BLEIZI ALL. DISKARET EO
BET AR BAGAD GANTAÑ
E-KERZH AN NOZVEZH KENTAÑ.
NE OA NEMET UNAN
A OA CHOMET BEV.
RET EO BET D'AN DUD
PEURLAZHAÑ ANEZHAÑ.

AN HINI NEMETAÑ
ON-ME O VEZAÑ
BET GWELET
ANEZHAÑ EN E SAV.



DEUET EO
JEANNE D'AM
GWELET EN
OSPITAL

TRUGAREKAAT
A RA ACHANON
A-BERZH
HE CHOAR.

DROUG HE DEUS
OUZHIN
MEMESTRA.

AET HE ZAD
DIWAR-WEL
E-KERZH AN
NOZ-SE.
GOUZOUT A OUZOMP
MAT, NI HON-DAOU,
PETRA ZO
C'HOARVEZET
DEZHAÑ.

KAOCH GANTI.
PLIJOUT A RAE-HI
KALZ DIN.



SUR HA N'EO
KET MARTEZE.

- E VO GRAET
KAOZ EUS AL
LOEN ADARRE.

EVEL MA VEZ
LARET ER
C'HOMIKSOÙ.



"- DA VEZAÑ
KENDALC'HET."

Lutuned Nedeleg




Bez 'to ezhomm eus :

- 2 voest 6 vi
- ur roll paper-revr
- Tri pladennig kotoñs pe kotoñs
- sizailh
- div touch-peg
- pentur gouach

Sañset e tlefes chom hep prenañ traoù hag implij ar pezh zo er gêr.

• En ur roll paper revr diviet e troc'hi gant da sizailh teir gwalenn evit an tri fenn lutun hag er walenig o chom e troc'hi an tri fri en ur ruilhañ anezhe e-giz ur maligorn.
Peg anezho mat warno o-unan ha goude peg ur fri war bep penn.



- En ur voest 6 vi e troc'hi korfoù al lutuned.
- Chom a raio daou veg vit ober ar bonedoù. En ar voest all e troc'hi an daou voned a vank.
- Gant teir ruilhennig kotoñs e ri gouzougennoù al lutuned. Dav eo dit lakaat anezho da vezañ ledanoc'h eget ar c'houzougou. Gant peurest ar c'hotoñs e ri pompomou ar bonedoù.

Liv an diazez e gwer, gant un touch gwenn evit al libitenn.
Liv an daoulagad e gwenn gant al liv, goude e tresi ar mab-lagad gant ur feultrenn zu hag ar genou e ruz gant ur c'hreion-feltr ivez.
Liv ar bonedoù e ruz pe e n'eus forzh peseurt liv all.

Pa vo sec'het al livaj e c'helli kenderc'hel : peg bep boned war bep penn ha goude bep gouzougenn war ar c'horfoù, ha bep penn klok war bep gouzougenn.



Ha neuze, brav eo da Lutuned Nedeleg ? Tenn ur pol-tred ha diskouez deomp 'ta !
Kas da boltred deomp hag embannet 'vo e Louarnig ! Gallout a rez kas poltridi labourioù-dorn all ivez.

Nedeleg laouen dit !

Sekred-kegin an Nedeleg e Bro-Alamagn

« Lebkuchen »

- Didammeriou evit stummañ an toaz
- 175gr mel • 50gr sukr
- 2 loaiad vras eoul tro-heol
- 1 melen-vi
- 1 loaiad vihan a boultr chokolad
- 1/2 eus chug ur sitroñs
- ul loaiad vihan a boultr kanell
- 250 gr bleud gwinizh
- 2,5 loaiad vihan goell kimiek
- 75 gr poultr alamandez
- Sukr lindr hag ur banne dour
- Vermisel sukr pe chokolad evit kinklañ



- 1** • Lak ar forn da dommañ betek 175 derez
- Lak ar mel, ar sukr, an eoul ha div

loaiad vras a zour asambles, da deuziñ goustadik en ur gastelodenn

- Mesk mat ha lak pep tra e-barzh ur bodez
- Laosk an toaz da zistanañ e-pad ur prantadig



- 2** • Lak ganto ar melen-vi, ar poultr chokolad, ar chug sitroñs hag ar spisoù, hag an 2/3 eus ar bleud, asambles gant ar goell-toaz
- Da-heul, lak peurrest ar bleud gant ar poultr alamandez ha mesk pep tra a-benn aozañ toaz
 - Lak bleud ouzhpenn m'eo pegus an toaz



Plad an toaz betek kaout 0,5 santimetr trad uhelder

3



4

Troc'h anezhi gant didammeriou ha lak pep tamm war ur blankenn n'eo ket pegus anezhañ pe war un tamm paper parch



- 5** Tamouez ar sukr lindr ha mesk anezhañ asambles gant ul lommig dour a-benn kaout un toaz tev



Ur wech poazhet al lebkuchenou e c'hellez goleiñ anezho gant

lindraj, pe c'hoazh vermisel sukr, pe chokolad, pe kraoñv a bep seurt, a-benn kinklañ anezho-



Menam Menam!



Mojenn ar maiz ruz

Kontadenn hengounel Maya

Peder seurt maiz disheñvel zo e Bro-Watemala : an hini gwenn, an hini melen, an hini du hag an hini ruz. Ne vez ket kavet maiz ruz kement ha maiz gwenn ha maiz melen avat. Petra eo orin ar maiz ruz neuze ?

Lavaret e vez e oa bet ur naonegezh pell pell zo abalamour ma oa ar plantennoù maiz o vervel. Ne oa netra da zebriñ ken. Al loar neuze, Ixmukane, mamm-gozh ar vMayaed, a zeue da vezañ trist o welet holl he bugale o c'houzañv hag o vervel gant an naon. « N'eo ket posupl e yafe da get ma diskennidi ! Emaon o vont da sikour anezho » emezi.

D'ar c'houlz-se ne oa ket nemet tri spes maiz : an hini gwenn, an hini melen hag an hini du. Ixmukane a zivizas krouiñ un hadenn maiz nevez diwar an tri c'hentañ kreñv a-walc'h evit kreskiñ ha reiñ frouezh brav. Lakaat a reas an holl hadennoù nevez en ur sac'hig hag e roas anezhañ d'he merc'h. « Sell, emaut o vont da ziskenn war ar bed ha da reiñ an hadennoù 'm eus krouet evit magañ hor bugale. Met diwall, ret e vo dit diskenn dindan tres ur briñsez ha reiñ an hadennoù d'an hini onestañ, gwiriek ha brokusañ. E-touez tout an dud e ranki kavout anezhañ ! »

Sentiñ a reas ar plac'hig ouzh he mamm. Diskenn a reas betek an Douar hag e klaskas war-lerc'h an den-se. « Demat deoc'h, » emezi d'ur beizantez « anavezout a rit un den mil-onest, gwirion ha brokus er c'horn bed-mañ ? » « Digarezit, ne ran ket, amañ eo dizonest an dud abalamour d'an naonegezh. » Neuze e kendalc'has en ul lec'h all : « Demat deoc'h, emeon o klask un den mil-onest, gwiriek ha brokus er c'horn bed-mañ. Anavezout a rit un den e-giz-se ? » « Ne ran ket, pizh eo an dud du-mañ abalamour d'an naonegezh... » a respontas ur paotr kozh. Mont a reas da welet kantadoù ha kantadoù a dud dre Bro-Watemala a-bezh hep kavout an hini a faote dezhi kavout.

A-benn ar fin e soñjas d'ar briñsez ne gavje ket den ebet. Ken glac'haret ma oa, e tivizas azezañ war ur maen en disheol dindan ur wezenn. Tremena a reas ur





paotr hebiou dezhi e-keit-se . O c'hwezhiñ e oa goude e devezh labour. O welet ar paotr, e lavaras ar briñsez : « Eus pelec'h emac'h o tont e-mod-se ? » « Eus ar park. Emaon o labourat an douar evit klask hadañ maiz en-dro » « Ha petra a rit bemdez ? » « Ober a ran war-dro an douar ha war-dro ma familh. Sikour a ran an dud tro-dro din hag e kemeran perzh e buhez ar c'humuniezhañ ». O klevout ar c'homzoù-se e teuas merc'h Ixmukane da vezañ laouen-tre peogwir e kave dezhi he doa kavet ar paotr onestañ, gwiriekañ ha brokusañ er vro.



« Sell 'ta, c'hwi eo an den a oan o klask ! Ma mamm Ixmucane, al loar, he doa goulennet diganin kavout un den ispisial evit reiñ dezhañ ar sac'hig-mañ » eme ar briñsez d'al labourer-douar. « N'eo ket posupl, n'on ket nemet ur paotr paour ha ne ra ket nemet klask lakaat e familh da chom bev. Perak e rankfec'h reiñ ar prof-se din ? N'on na priñs na roue. » a c'houlennas ar paotr. « Geo, ma mamm he deus lavaret-se din, ne fazian ket. Mar plij astennit ho taouarn evit degemer an hadennoù-se. Ret vo deoc'h hadañ anezho hag e teuint da vezañ plantadennoù bras ha saourus. Met ret eo deoc'h ingalañ anezho etre ar muiañ posupl a dud evit ma chomfe an naonegezh a-sav a-benn savetiñ ar bobl Maya. »

War-nes mont kuit oa ar briñsez pa voe gloazet en he zroad gant ur spernenn. Daoust da se e kerzhas en-dro war he roud hag e pignas en aer evit distreiñ e-kichen Ixmukane. Pa voe ar plac'hig aet diwar-wel e verzhas al labourer-douar e oa takennoù gwad war an douar el lec'h oa bet tremenet ar briñsez. Dastum a reas anezho en e zaouarn hag e tivizas e hado ar maiz e-mesk gwad merc'h Ixmukane.

Ur frapad amzer goude-se e oa an holl dud diabask o welet an eostad... Pebezh souezhadenn 'voe pa 'verzhas ar geriadennad 'oa ruz ar maiz nevez ! Dalc'het en doa soñj al labourer-douar en doa mesket an hadennoù gant gwad merc'h al loar hag en em lavaras : « Gwad sakred ar briñsez zo er maiz ! ».

Abaoe an deiz-se, diouzh klevet, pa vez hadet maiz ruz e c'hell kreskiñ forzh peseurt maiz da-heul : ruz, du, gwenn pe melen... Sin m'eo bet brokus al loar gant he bugale o profañ ar maiz ruz dezho.

Ar gontadenn-mañ oa bet dastumet gant Yoni, ur c'hontour Maya, el levr « La Esperanza » e bro Quetzaltenango. Tresadennoù gant Marine Cariou



AM 3D



un doare all d'ober enklaskoù arkeologel



Serge Cassin gant ul lodenn eus e skipailh (© Françoise Guy)

Serge Cassin zo arkeologour diouzh e vicher e skol-Veur an Naoned. Ur mailh eo war ar savadurioù bet savet da vare oadvezh nevez ar maen, an Neolitik ma kavit gwelloc'h. Evel n'eus forzh peseurt arkeologour e oar kas furchadennoù da benn, gant ostilhoù boutin : palioù, loaioù ha me oar-me. Met dedennet-bras eo gant ar binviji nevez ivez, evel al luc'hskeudenner niverel, ar skaner pe al lazer.

Abaoe 2011 e labour gant e skipailh war karn Gavriniz, e pleg-mor ar Mor-Bihan. Savet e oa bet ar bez-se e-tro 3 800-3 700 kent Jezuz Krist ha serret 400 bloaz war-lerc'h. D'ar poent-se e veve an dud diwar al labour-douar hag ar sevel chatal. Keriadennoù o doa savet. Gouzout a ouient sevel podoù-pri ha gwiadiñ. Niverus a-walc'h e oant evit stagañ gant labourioù bras. Un tamm mat izelloc'h e oa ar mor ivez. Gavriniz ne oa ket un enezenn c'hoazh. Aesoc'h e oa mont di eta.






Ur c'harn eo Gavriniz.

Dindan ar pezh mell bern men e kaver ur gambr, 25 metrad karrez dezhi, hag un trepas da gas di.



Kavet ha furchet e oa bet en XIX^{vet} kantved. Souezhet e oa bet an arkeologourien gant ar vein kizellet a-hed an trepas hag ar gambr.

Ha savet e oant bet a-ratozh-kaer evit ar c'harn ?



Gouzout a ouezomp bremañ, a-drugarez d'ar furchadennoù bet kaset da benn er bloavezhioù 1980, e teu lod eus ar vein eus lec'hioù all. Koshoc'h e oant eta hag implijet en-dro gant saverien ar c'harn.



Evit mont pelloc'h en deus divizet Serge Cassin niverenniñ en 3D an holl gizelladennoù a gaver er c'harn. Evit en ober en deus ranket klask tud boazet d'ober gant an teknikoù nevez-se. Kenlabouret en deus gant un tisavour ivez, Laurent Lescop e anv.


Diwar-se o deus gellet sevel stummoù 3D eus an holl gizelladennoù. Kavet ez eus bet re nevez zoken ha roudoù eus livioù war mein zo ! Peadra o deus an arkeologourien evit studial a nevez karn Gavriniz a-drugarez d'an 3D.

Ha moarvat, er bloavezhioù o tont, e c'hellimp ni hon-unan pourmen

er c'harn 3D-se ha gwelet traoù ne c'hellomp ket gwelet evit poent !

Da gentañ penn o deus kemeret luc'hskeudennoù niverel eus pep maen kizellet, sklerijennet en un doare ispisial, evit gwelet gwelloc'h ar stummoù.

Implijet o deus meur a lazer hag a skaner ivez.





Naggeneen

SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU

BREZHONEG : C. ARSQUARCH HA Y.F. JACQ



TECHET EO AN DUD
DA SEVEL O ZIEZ
DROCH UHELOCH' H UHELAÑ.
KLEUZIAÑ A
REOMP-NI.
GENETIK EO
MOARVAT.



DEUS TA, EMAON
O VONT DA GINNIG
AC'HANOUT DA IZIL
KUMUNIEZH « THE
GREAT HOLE ».



SED' AMAÑ
DAOU GAMALAD NA
C'HELLER KET DISPARTIAÑ.
TADIG GLAS, UR C'HORRIG,
HA KELYON E GENDERY
EUS KERNE-VEUR, PIKSI
ANEZHAÑ



SAULD DIT RUDDY,
PELLAET TEUS DEUS
KAEOD TROUZUS KER
A-BENN DONT DA
WELET AC'HANOMP ?

DRES, YA.
SETU NAGGENEEN,
UNAN NEVEZ.



SAULD DIT,
NAGG.

'LUD DIT.



LAMBIGER EO
NAGGENEEN.
HINI GWELLAÑ
BRO-IWERZHON !



SELL TA !

BEUZ !

MEZEGEZ-LOENED

HOSPITAL AL LOENED !

Gant
Sandrine,
mezegez-loened
Louarnig !

Evit pareañ al loened e vez graet evel ma vez graet gant an dud. En ur c'hlañvdi-loened e vez kavet meur a rann a anavezez dija : un ti medisin, un ti dentour, un ti skeudenniñ medisinel (radiologiezh, ekografiezh), ul labourva medisinerezh (evit dielfennañ ar gwad, da skouer), ur blok operata hag ivez kaouedoù hag a servij da gambreier ospital !

Ma vez drouk ur c'hi, da skouer, e c'haller lakaat ur minell dezhañ, pe ober ur bikadenn evit lakaat anezhañ da sioulaat : diankeniañ a vez graet eus se.

Sed' amañ o c'hambreier ospital !

AR BLOK OPERATA

AR C'HAOUEDOÙ


AN OSTILHOÙ KUZULIAÑ




UR GWREZVERKER



UR SELAOUENNER



UR STRINKELL



AR MEKANIK DA LENN PUSOÙ ELEKTRONEK

Labourat a ra ar mezeg-loened gant ar memes meka-
nikoù hag ur mezeg boutin : ur gwrezverker, ur boue-
zerez, ur selaouenner, strinkelloù ha nadozioù.

**Operataet e vez al loened pa vez
ezhomm, evit ur pav torret da skouer. Ober
a ra ar mezeg-loened un anesteziezh hollek
gant ur bikadenn ha gant un anesteziezh
aezhennek (analiñ a ra al loen un aezhenn
hag a lak anezhañ da gousket).**

AR SAL KUZULIAÑ



Louzeier a bep seurt a c'hall kemer
al loened : vaksinoù, sirosoù, kachedoù,
louzeier revr zoken...
Ar re-se ne blij ket kalz dezho !

AR SAL GORTOZ

'Lec'h ma
vezez o c'hortoz
da loen !



Pa vez klañv ul loen-
feurm ez a ar mezeg-loened
betek ar feurm evit parañ
anezhañ. Karr ar mezeg-loened
a zo evel ur c'hlañvdi-loened
bihan war rodoù !

